

# KENVREURIEZ AR BREZONEG



Nº 22

Kenvreuriez ar Brezoneg  
eskopti Kemper ha Leon

K A I E R 22

|                            |     |
|----------------------------|-----|
| Dre zil ha dre gaer.....   | I44 |
| I5ed SUL ORDINAL A.....    | I45 |
| I6ed SUL ORDINAL A.....    | I48 |
| I7ed SUL ORDINAL A.....    | I51 |
| I8ed SUL ORDINAL A.....    | I54 |
| I9ed SUL ORDINAL A.....    | I57 |
| 20ed SUL ORDINAL A.....    | I60 |
| 2Ied SUL ORDINAL A.....    | I63 |
| GOUEL AR GALON ZAKR A..... | I66 |
| SUL AN DREINDED A.....     | I69 |

Troidigeziou aotreet,dre arnod, evid an eskopti,  
aberz an Aotrou F.Barbu, eskob Kemper ha leon

Kemper,d'an IO a viz gouere 1972

+ Visant FAVE, eskob-skoazeller

Komanantit da Gaierou "Kenvreuriez ar Brezoneg" .

Job Seite - 29 N GUISSÉNY

C.C.P. 1738 - 66 RENNES

CHI

## DRE ZIL HA DRE GAER...

VAROULHA E BLOUHA...

HOULHA E BLOUHA...

War a-raog ez a tachenn ar brezoneg el lidèrèz; war bouezig avad!

Lod a grède dezo e vefe eet buannoh ha paoata a reont! Ped ha ped lizer on-neus bet!

- "D'an Aotrou 'n Eskob rei urz hag e vo gwelet!"

Siwaz! Kaozeal evel-se a zo dianaoud an dud hag an istor.

Koll amzer eo klask mond dre hag d'an dud, d'ar veleien koulz ha d'an dud fidel. Ni, Bretoned, a zo euz gouenn ar Gelted, kalonou acur, med tud dizuj. Ne blij ket deom e vefe re stard r gwakol, na re verr er stag; greet om evid ar frankiz. Dre gaer eo mond deom. Ar sperejou eo a zo da drei nebeud ha nebeud. Keid-all a zo om bet goapeet ablamour d'ar brezoneg, d'or giziou! Kement ha kement ma 'z oam deuet - tra mantruz! - da gaoud mez ahanom on-unan hag ar vez-se a oa eet beteg mel on eskern.... Nag a zarvoudou doaniuz a hellfed da gonta! Arabad e oa komz brezoneg dirag ar vugale... gand aon na dapfent laou moarvad!

- "Ha perag 'ta e vez prezeget deom e brezoneg en iliz? Kaoud a ra d'ar veleien ez om tud diwarlerh? Ha c'hoant o-deus d'on delher er renk-se? Ni a oar galleg ivez koulz ha tud ar hêriou... M'ema kont evel-se, ne din mui d'an overenn...! Hag ar beleg paour, nehet maro.

Gwella pezh 'zo ez eus deuet cheñchamant, o nebeudig! er sperejou digorra. Ar menozioù nevez a rank kaoud amzer evid astenn o leve - zon war muioh-mui a dud. N'eo ket eur frapadenn a hell diwrizienna an treuzyeod eet ken don. War ar yaouankizou eo deom konta.

Da vignoned ar brezoneg e lavarom: "Taolit evez ma klaskit c'hoari an "tout pe netra", lies gwech n'ho po netra. Klaskit kor-zigeri dor an iliz d'ar brezoneg, poagnit neuze ma vo plijuz d'an oll al lodenn roet d'ar brezoneg hag ez ay war gresk, harpet gand muioh-mui a dud.

Poagnit! da lavared eo kemerit perz, roit hoh amzer, ho mouez, hoh arhant; sikourit e peb doare!

N'eo ket a-walh gouenn ha lezel ar zamm gand ar re all. Deskit kas ar han hag ar pedennou endro - mar doh dornet evid kement-se - en eun overenn e brezoneg. En eun overenn e galleg ivez da gomañs marteze, evid diskouez eh ouzoh ho micher.

Bez 'on-neus hiniennou gouest ha barreg, n'int ket stank avad! Ker barreg hag eur beleg da rei buez ha lusk d'eun ilizad tud e brezoneg. Eur vicher eo hag a vez desket.

War bouezig!

Dre zil...ha mond don...

"Tout pe netra?" Nann! Ober hirio ar pezh a heller da ober hirio hag ober mad.

Warhoaz e vo deiz adarre hag e tigorim eun ero nevez.

K. ar B.

I5<sup>ed</sup> SUL ORDINAL

LENNADENN GENTA: Komz Doue a laka buhez da ziwan ha da vleunia war an douar.

LENNADENN EUZ LIZER AR PROFED IZALAZ. (55/IO-II

IO. Selaquit komzou an Aotrou:

- Ar glao hag an erh, diskennet euz an neñv, ne savont ket en-dro,  
heb beza douret an douar, lakeet ar vez da ziwan,  
drevajou da vleunia enni, evid rei had da hada ha bara da zebri.  
Evelse ivez ema kont gand ar gomz a gouez euz va muzellou,  
ne zistroio ket din en-dro, heb beza greet tro vad,  
greet ar pezh a fell din, ha kaset da benn ar pezh am -eus fiziet enni.

SALM 64 (IOab cd, IO-II, I2-I3, I4)

|| Hadet en douar mad,  
|| komzou Doue a zougo frouez.

IO. Dond a rit da zour an douar,  
abcd d'e lakaat druz ha frouezuz.  
Steriou Doue a zo braz an dour enno;  
puill e tiwan an eost.

+++++

IOe Evelhenn e kempennit an douar:  
II. o toura an irvi, o plênaad ar parkeier,  
gand barradoù glao e tistrempit anezo,  
war an hajou, e skuilhit ho pennoz.

+++++

I2. Bleunia 'ra ho madelez a-hed ar bloaz,  
ne ehanit da skuill ho madoù dre ma 'z it.  
El lanneier e red an dour,  
hag ar runiou a zo warno tres al levez.

+++++

I4. Chatal eleiz a zo er prajou.  
An traoniennou a zo goloet a ed,  
e peb leh, kanaouenn ha levez.

+++++

EIL LENNADENN: Ar bed oll a zo o huanadi, o hortoz beza kemeret evid bugale da Zoue.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL D'AR ROMANED. (8/I8-23

- I8. D'am zonzj, n'eo netra ar poaniou a houzanvom bremañ,  
e-skoaz ar hloar a dle beza roet da anaoud ennom.
- I9. Rag ar bed krouet a zo o hortoz gand mall e ve roet da anaoud gloar Doue.
- 20. Rag, mar deo bet lakeet dindan galloud an dizurz - ha n'eo ket a-benn-e-greiz, -  
med ablamour d'en hini, e-neus greet dezañ plega d'an dizurz -  
eo en esper da veza en ivez dilivret euz sklavêrêz an droug  
ha kaoud perz er frankiz a zo e gloar bugale Doue.

22. Hen gouzoud mad a reom:an oll draou krouet a zo o hirvoudi,  
hag o houzañv poaniou eur gwilioudi,a bad c'hoaz bremañ.
23. Med o hortoz emaoñ beza kemeret evel bugale da Zoue ha gwelet or horv dasprenet.

# SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !

Ho komz deoh a zo gwirionez,  
grit ma vim gouestlet deoh dre ar wirionez. Alleluia !

## AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. I3/I-23)

- I. En dervez-se, Jezuz eet er mēz euz an ti,  
a oa azezet war ribl ar mor.
2. O veza ma teue eur bern tud en-dro dezañ, e sav en eur vag,
3. hag eh azez enni, e-keid ha ma chom an dud war an aod,  
ha Jezuz a genteill anezo war galz a draou dre barabolennoù:
4. Un hader, emezañ, a ya da hada; epad m'edo o hada e kouez greun war gostez an hent.  
Mond a reont gand al laboused.
5. Lod all a gouez war ar grae (grateill), n'oa ket kalz a gondon.  
Diwan a reont buan, rag n'oa ket a zonder douar.
6. Pa zav an heol ez int skaotet, dizehi a reont, rag n'o-deus ket a wrizioù.
7. Lod all a gouez e-touez ar spern; ar spern a gresk hag a voug ar greun.
8. Eul lodenn all a gouez en douar mad, hag a daol frouez:  
kant, tri-ugent, tregont evid unan.
9. D'an neb e-neus diskouarn da intent...
10. An diskibien a dosta outañ hag a houlenñ:  
- Perag e komzit dre barabolennoù ?
11. Deoh-hwi, emezañ, eo roet ar hras da anaoud misterioù rouantelezh an neñv,  
med d'ar re-mañ n'eo ket roet.
12. Rag roet e vo d'an neb e-neus, med digand an hini n'e-neus ket e vo dilammet  
zoken ar pezh e-neus,
13. setu perag e komzan dre barabolennoù, ablamour ma welont heb gweled,  
ma klevont heb klevet na kompren.
14. Evelse e teu da wir evita komzoù Izaiaz:  
" kaer ho pe klevet, ne intentoh ket,  
kaer ho pe gweled, ne weloh ket.
15. Poud eo deuet da veza spered an dud-se.  
Stanket o-deus o diskouarn, serret o-deus o daoulagad,  
gand aoñ na zeufe o daoulagad da weled, o diskouarn da glevet,  
o spered da intent, o halon da zistrei war ar mad,  
gand aoñ na zeufen da rei dezo ar pare."
16. Evidoh c'hwi, eüruz ho taoulagad, pegwir e welont, ho tiskouarn pegwir e klevont.
17. Gwir eo, m'henn lavar deoh, nag a brofeted, nag a dud santel  
o-deus c'hoanteet gweled ar pezh a welit ha n'o-deus ket gwelet,  
klevet ar pezh a glevit ha n'o-deus ket klevet.
18. Selaouit eta, c'hwi, parabolenñ an hader.
19. Pa glev an den Komz ar Rouantelezh, heb heñ intent,  
e tigouez an droug spered hag a gas gantañ  
kement zo bet hadet e kalon an den-se.  
Hennez eo an hent bet hadet warnañ.
20. An hini e-neus resevet an had en eun douar meñneg,  
eo an den a glev ar gomz,  
a zigemer anezi raktal gand joa,

21. med n'eus ket a wrizicou ennañ, hedro eo; pa zeu enkrez  
pe heskinèrèz warnañ, diwar goust ar Gomz,  
e kouez dioustu.
22. An hini e-neus resevet an had e-touez ar spern eo an den a glev ar Gomz,  
med tregas ar vuez, e hast ouz an arhant, a voug ar Gomz,  
ha ne zav netra diwarni.
23. An hini e-neus resevet an had e douar mad,  
eo an hini a glev ar Gomz hag a gompren anezi,  
dougenn a ra frouez, kant, tri-ugent, tregont diwar unan.

#### PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, c'hwi hag a ro d'an dud diañket sklerijenn ho kwirionez,  
evid ma hellint distrei war an hent mad; +  
grit da gement hini a zoug an ano a gristen,  
trei kein d'ar pezh ne zere (na zigouez) ket ouz an ano-se,  
hag heulia ar pezh a zere outañ.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,  
Doue beo ganeoc'h ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

#### WAR AR PROVOU

Taolit ho sellou, ni ho ped, Aotrou Doue,  
war ar provou a ginnig dech an Iliz ouz ho pedi; +  
grit d'ho tud fidel reseco evid o zilvidigez  
ar provou-se, pa vint bet konsakret.  
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

#### GOUDE AR GOMUNION

P'on eus resevet ar Zakramant, ni ho ped, Aotrou Doue, +  
ma kresko ennom,  
o kemer perz en Overenn,  
ar frouez a zilvidigez.  
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

I6 ed SUL ORDINAL

LENNADENN GENTA. D'ar re o-deus pehet, e roit Aotrou Doue ar hras da zistrei davedoh.

LENNADENN EUZ LEVR AR FURNEZ (I2/I3, I6, I9)

- I3. Nann, n'eus Doue all ebed nemedoh da gemer preder gand ar bed oll  
hag e vefe red deoh diskouez dezañ n'eo ket displeal ho pardedigez.
- I6. Rag ho nerz eo a ra deoh beza just;  
hag o veza ma 'z oh mestr war beb tra,  
ez oh ivez damantuz da beb tra.
- I7. Diskouez a rit ho nerz, pa ne vez ket kredet eo braz ho kalloud,  
hag ar re a zav a-eneb dezi, en eur houzoud petra 'reont,  
a vez kastizet ganeoh.
- I8. Med c'hwi a jom mestr d'ho nerz, ha barn a rit gand douster;  
gouarn a rit ahanom gand kalz a drugarez,  
rag pa garit, raktal e hellit diskouez ho kalloud.
- I9. En eur ober evelse, ho-peus desket d'ho pobl e tle an den just beza leun  
a vadelez,  
hag ar gaer a esperañs ho-peus roet d'ho pugale,  
e roit tro da jeñch buez d'ar re o-deus pehet.

SALM 85 (5-6, 9-10, I5-I6a

|| Aotrou Doue madelezuz,  
|| c'hwi a ro ar pardon.

5. Aotrou Doue, c'hwi 'zo mad ha trugarezuz,  
leun a garantez evid ar re a zeu d'ho kelver.
6. Selacuit, Aotrou, va fedenn.  
Klevit va mouez ouz ho pedi.  
+++++
9. An oll vroioù krouet ganeoh, Aotrou, a zeu da stoui dirazoh,  
ha da renta gloar d'hoh ano.
10. Rag c'hwi 'zo braz ha burzuduz hoh oberou,  
c'hwi an Doue n'eus nemedoh.  
+++++
15. Med c'hwi, Aotrou Doue, leun a vadelez hag a drugarez,  
difenn da vend e kounnar,  
leun a garantez hag a virionez,
16. troit ho sell warnom hag ho pet truez ouzim.

+++++

EIL LENNADENN Ar Spered a bed en on leh deom.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL D'AR ROMANED (8/26-27)

26. Ar Spered a zeu war zikour or zempladurez,  
rag n'ouzom ket pedi evel m'eo dleet.  
Med ar Spered e-unan a erbed evidom,  
gand huanadennoù ha n'hell dên o displega.
27. Doue, hag a wel e goueled ar halonoù  
a anavez menozioù ar Spered.  
Her gouzoud a ra: en eur bedi evid an dud fidel,  
ar Spered a glask ar pezh a blij da Zeu.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia! Alleluia!

Hiviziken, c'hwi a vezo va mignoned, eme or Zalver;  
ar pezh am-eus bet digand va Zad  
am-eus roet deoh da anacud. Alleluia!

AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. (13/24-43)

24. Jezuz a roas dezo da gleved ar barabolenn-mañ:  
- Heñvel eo Rouantelez an Neñvou ouz eun dên,  
e-neus hadet greun mad en e bark.
25. Med e-pad m'eo kousket an dud, e tigouez e enebour,  
hag a had, d'e dro, dreog e-touez ar gwiniz, hag ez a kuit.
26. Pa gresk ar yeotenn, ha pa zeu pennou en ed,  
neuze e oe gwelet ivez an dreog.
27. Servicherien a ya da lavared d'ar mestr:  
- Mestr, daoust ha n'eo ket greun mad eo ho-poa hadet en ho park?  
Perag eta ez eus dreog ennañ?
28. Eñ a respont dezo:  
- Eun enebour eo e-neus greet kement-se.  
Ar zervicherien a lavar dezañ:  
- Ha c'hoant ho-peus ez afem d'o zenna kuit?
29. Eñ a lavar:  
- Nann, gand aoñ na zeufeh, en eur zastum an dreog,  
da denna ar gwiniz da heul.  
Lezit da greski asamblez an eil hag egile beteg an eost.  
Ha da vare an eost, e lavarin d'an eosterien:  
dastummit da genta an dreog, hag endrammit anezo d'o devi,  
ar gwiniz avad, dastummit anezañ em hrignol.
- (amañ eh echu al lennadenn diverreet)
31. Ur barabolenn all a roas dezo da gleved:  
Heñvel eo Rouantelez an Neñvou ouz eur hreunenn zezo,  
e-neus eun den kemeret hag hadet en e bark.
32. Bez 'ez eo ar bianna euz an hajou.  
Med p'he-deus kresket e vez brasa plantenn a vez el liorz,  
hag e sav zoken da wezenn, ken a zeu al laboused  
da neizia en e skourrou.
33. Eur barabolenn all a lavar dezo:  
Heñvel eo Rouantelez an Neñvou ouz eun tamm goêl,  
kemeret gand eur vaouez da gamesk gand tri vuzul bleud,  
beteg ma sav an toaz a-bez.



34. Kement-se a lavare Jezuz dre barabolemn d'ar bobl,  
morse ne gomze dezo nemed dre barabolemnou.
35. Evelse e teue da wir ar gomz lavaret gand ar profet:  
- Komz a rin dre barabolemnou  
hag embann traou kuzet abaoe ar penn kenta.
36. Neuze e tilezas an dud hag e teuas d'ar gêr.  
hag an diskibien a dostaas outañ hag a lavaras:  
- Displeg deom sklêr parabolemn an dreog er park.
37. Respont a ra:  
- An hini a had ar greun eo mab an den,
38. ar park eo ar bed,  
ar greun mad eo ar re a zo bugale ar Rouantelez,  
an dreog eo bugale an droug,
39. an enebour a had anezi eo an diaoul,  
an eost eo fin ar bed,  
an eosterien eo an êlez.
40. Evel eta ma vez dastumet an dreog ha lakeet an tan enno,  
evelse ivez e vo kont da fin ar bed.
41. Kas a ray mab an den e êlez hag e tastumint euz e Rouantelez  
an oll skoueriou fall ha kement den a ra an droug
42. hag e taolint anezo e-kreiz an tan;  
enc e vo daelou ha skrignadeg dent.
43. Neuze an dud just a skedo evel an heol e Rouantelez o Zad.  
Kleved an neb e-peus diskouarn.

#### PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, o kaoud truez hag o pardoni,  
e tiskouezit ar gwella ez oh oll-halloudeg; +  
skuillit 'ta muioh-mui ho trugarez warnom,  
ha grit deom kerzed gand mall war hent ho promesaou,  
da hounid on lod e madou ar baradoz.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

#### WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, gand Sakrifis ar Groaz,  
c'hwi ho peus savet, e-leh sakrifisou lies-seurd al Lezenn Goz,  
ar Sakrifis parfet ha nemetañ; +  
resevit digand ho tud fidel Provadenn ar Zakrifis-se,  
ha skuillit ho pennoz warni, evel gwechall war provou Abel, +  
evid ma talvezo da zilvidigez an oll ar pez a ginnig deoh peb unan.  
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

#### GOUDE AR GOMUNION

Emaon euz ho pedi, Aotrou Doue:  
evel ma vezom, gand tro ar vuez, atao o kerzed  
euz an traou tremenet warzu ar re nevez, +  
grit deom dilezel a-grenn ar vuez a-wechall er pehed,  
evid rên ar vuez nevez gand ho spered a zantelez en or halonou.  
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

17 ed SUL ORDINAL

LENNADENN GENTA Salomon a houlen digand Doue kaoud digantañ ar furnez.

LENNADENN EUZ LEVR KENTA AR ROUANED (3/5,7-12)

5. E Gabaon,Doue en em ziskouez da Zalomon epad e gousk hag e lavaras dezañ:  
- Goulenn ar pezh az-peus c'hoant a rofen dit.
6. Salomon a respontas:  
- Va Doue,lakeet ho-peus ho servicher da roue warleh David,va zad,  
ha me n'eus ahanon nemed eun den yaouank flamm,  
ha n'ouzon ket penaoz ober evid beza ar mestr.
8. Ho servicher a zo e-kreiz eur bobl bet dibabet ganeoh,  
eur bobl diniver,  
kement a dud enni ma ne hellont na beza kontet na beza niveret.
9. Roit d'ho servicher kaoud skiant vad en e galon  
evid gouarn ar bobl,  
hag anaoud ar mad diouz an droug;  
rag piou 'hellfe beza gouest awalh da houarn ho pobl,ken braz eo ?
10. Plijoud a reas da Zoue e-nefe Salomon greet eur goulenn evelse.
11. Ha Doue a lavaras dezañ:  
- Pegwir az-peus goulennet an dra-ze,  
ha n'az-peus ket goulennet buez hir evidout,  
na pinvidigez,na maro da enebourien,  
med pegwir az-peus goulennet skiant vad evid gouarn gand furnez,
12. setu ma roan dit da houlen.  
Rei a ran dit eur spered fur ha lemm,  
evel n'e-neus bet den ebet en da raog ha n'e-no den war da lerh.

SALM 118 (57,72,76-77,127-128,129-130)

57. Me garfe,va Doue,heulia ho lezenn,  
va lod,henn lavaret am-eus,Aotrou Doue,eo mired ho komzou.
72. Eun dra vad eo ho lezenn evidon.  
Gwelloh eo eged berniou aour hag arhant.  
+++++
76. Ra zeuy ho karantez d'am frealzi,  
hervez ho promesa d'ho servicher.
77. Diskouezit din ho madelez hag e vevin,  
rag ho lezenn a ra va dudi.  
+++++
127. Ablamour da ze eo plijet din ho kourhemennou,  
kalz muioh eged an aour,an aour digemmesk.
128. Setu perag e renin va buez warno,  
kas am-eus ouz hent ar gaou.  
+++++
129. An emgleo ganez a zo eun dra dudiuz;  
setu perag e viran anezañ.  
Da gomzou a zo sklerijenn evid an dud,  
digeri a ra dezo o spered.  
+++++

EIL LENNADENN -

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM. (8/28-30)

28. Va breudeur, evid an dud a gar Doue,  
 ni oar e tro peb tra evid o mad,  
 o veza m'int bet galvet hervez e venoz a garantez.
29. O anavezet e-neus a oll viskoaz,  
 hag o dibabet da zond da veza heñvel ouz e Vab,  
 evid ma vo hemañ ar henta euz kalz a vreudeur.
30. Ar re e-neus dibabet e-neus ive galvet (d'ar feiz);  
 ar re e-neus galvet, e-neus grêt anezo dibeh;  
 hag ar re e-neus grêt dibeh, e-neus roet dezo e hloar.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !  
 Bennoz deoh-c'hwi, Doue an Tad, Mestr ar bed,  
 da veza roet da anacud d'an dud keiz misteriou ar Rouantelez. Alleluia !

AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. (13/44-52)

44. Jezuz a gomzas evelhenn d'an dud:  
 - Heñvel eo, emezañ Rouantelez an Neñvou,  
 ouz eun teñzor bet kuzet en eur park,  
 ha kavet gand eun dên;  
 e guzad a ra en-dro ha gand e levenez,  
 ez a da werza kement e-neus hag e pren ar park.
45. Heñvel eo c'hoaz Rouantelez an Neñvou ouz eur marhadour,  
 o klask perlez kaer;
46. kavet gantañ eur berlezenn a dalvoudegez-vraz,  
 ez a da werza kement e-neus hag e pren anezi.
47. Heñvel eo c'hoaz Rouantelez an Neñvou ouz eur roued taolet er mor,  
 hag a zeu gantañ pesked a beb seurt.
48. Pa vez leun, ar besketerien a jach anezañ war an aod,  
 hag eh azezont da zastum ar re vad e panerou,  
 ha da daoler kuit ar re fall.
49. Evelse e c'hoarvezo da fin ar bed;  
 an êlez a zeuio hag a zibabo ar re fall a-douez an dud just
50. hag a taolint anezo e kreiz an tan.  
 Eno e vezo daelou ha skrignadeg-dent.
51. Ha komprenet ho-peus kement-se ?  
 - Ya, emezo.
52. Eñ a lavaraz dezo:  
 - Kement skrib, deuet da veza diskibl e Rouantelez an Neñvou  
 a zo heñvel ouz eur penn-tiegez,  
 hag a denn euz e deñzor traoù nevez ha traoù koz .

oooooooooooooooooooo

## PEDENN AN DIGOR

C'hwi 'zo, Aotrou Doue, divennour an dud a esper ennoh,  
hag hebdoh n'eus netra nerzuz, netra santel: +  
skuillit stank warnom grasou ho madelezh,  
ha grit deom, en eur heulia an hent a verkit deom,  
ober seurd implij euz madou treménuz ar bed-mañ,  
ma hellim dija beza krog e madou peurbaduz an Neñv.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

## WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer ar provou-mañ,  
deuet deom diwar ho largentez: +  
mister santel an overenn, a vo grêt dre nerz ho kras,  
ra lako ahanom da veva santelloh er vuez-mañ,  
ha da hounid eürusted peurbaduz ar bed all.  
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

## GOUDE AR GOMUNION

Kemeret on eus perz, Aotrou Doue, er Zakramant santel,  
a verk, evid atao, ar zonz euz Pasion ho Mab karet: +  
grit ma talvezo d'or zilvidigez an donezon-mañ,  
roet deom gantañ e-unan en e garantez heb par.  
Eñ on Doue beo, ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

18 ed SUL ORDINAL

LENNADENN GENTA - Deuit ha debrit,eme an Aotrou.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (55/I-3)

- I. Setu amañ petra' lavar an Aotrou:  
- C'hwi oll hag ho peus sehed, deuit david dour,  
ha goude ma n'ho pefe ket a arhant,  
deuit, prena hag evit.  
Deuit, prena heb arhant hag heb paea, gwin ha lêz.
2. Perag dispign arhant gand ar pezh n'eo ket bara,  
ha dispign ho kobr gand ar pezh ne dorr ket an naon.  
Selaouit ahanon ha debrit traou mad,  
grit chervad gand meuziou euz ar re wella.
3. Bezet ho skouarn war evez, deuit davedon,  
selaouit hag e vo beo hoh ene.  
Ober a rin ganeoh eun emgleo peurladuz,  
o rei deoh ar grasou prometet da Zavid.

SALM I44 (8-9, I5-I6, I7-I8)

pe: Alleluia ! || Kanon bennoz da Zoue da viken, !  
|| Kanon bennoz da Zoue ! (kant IO)

8. Leun a drugarez hag a vadelez eo an Aotrou Doue,  
pell a-barz têri ha braz kenañ e vadelez.  
9. Mad eo an Aotrou ouz an oll, ha drugarezuz ouz an oll grouadurien.

+++++

- I5.0 daoulagad paret warnoh, an oll o deus fizians,  
ha c'hwi 'ro dezo o bevans d'ar mare.  
I6. Ho torn a zigorit, ha peb tra veo a roit dezañ e walh.

+++++

- I7. Leun a justis eo an Aotrou e kement tra a ra,  
leun a vadelez en e oll oberou.  
I8. Dond a ra da gichen kement hini a bed anezañ,  
kement hini a bed anezañ a wir galon.

+++++

EIL LENNADENN - Dén na netra n'hello on distaga diouz karantez Doue  
a zo en Aotrou Krist.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED.

8/35,37- 39

35. Picu a hello on distaga diouz karantez an Aotrou Krist ?  
ar waskêrêz, an anken, an heskinêrêz, an naon,  
an dienez, ar riskl, ar hleze ?
37. Nann ! e kement-se emañ an treh ganeom,  
dre zikour an hini e-neus or haret.
38. Ya, sur om a gement-se !  
nag ar maro, nag ar vuez,  
nag an êlez, nag an oll gallouduziou kuzet,  
nag an amzer a vremañ, nag an amzer da zond,  
nag ar stered, nag an neñvou,  
nag an donderiou, na tra grouet all ebéd,  
netra n'hello on distaga diouz karantez an Aotrou Doue,  
a zo Jezuz Krist, on Aotrou.

#### SALUD D'AVIEL

Alleluia ! Alleluia !  
C'hwil 'zo benniget, Doue an Tad, Mestr ar Bed,  
c'hwil hag a ro da anaoud d'ar re vian misteriou ho Rouantelez. Alleluia !

AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

(I4/I3-2I)

13. Jezuz a yeas kuit en eur vag d'eul leh digenvez (dezert),  
en e bart e-unan.  
Med an dud a glevas, hag int-i da guitaad ar hêriou,  
evid mond d'e heul, war o zroad.
14. Pa ziskennas en douar, Jezuz a welas eun niver braz a dud,  
truez a gemeras outo hag e pareas o hlañvourien.
15. Deuet an abardaez, e ziskibien a dosteas outañ hag a lavaras:  
- Digenvez eo al leh-mañ ha gwall ziwezad eo dija,  
deoh, digouvias an dud ma 'z eint er hêriadennou  
da brena peadra da zebri.
16. Med Jezuz a lavaras dezo:  
- N'eo ket red dezo mond kuit,  
roit dezo da zebri hoh-unan.
17. Hag int-i da respont:  
- N'on-eus amañ nemed pemp baraenn ha daou besk.
18. - Digasit anezo din amañ, eme Jezuz.
19. Neuze e reas d'ar bobl azeza war ar yeot,  
e kemeras ar pemp baraenn hag an daou besk,  
hag o sevel e zaoulagad war-zu an neñv,  
e lavaras ar bedenn a vennoz.  
Terri a reas ar baraennou hag o rei d'an diskibien,  
hag an diskibien a roas d'ar bobl.
20. An oll a zebras diouz o naon,  
hag e oe dastumet an tarmou bara,  
daouzeg panerad a oe anezo.
21. Ar re o doa debret a oa war dro pemp mil anezo,  
heb konta ar merhed hag ar vugale.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Bezit skoazell ho servicherien, Aotrou Doue,  
ha skuillit bepred ho madelez war ar re 'zo ouz ho pedi: +  
pa 'z int laouen o kaoud ahanoh da Grouer ha da Vestr,  
roit dezo a-nevez donezonou ho karantez,  
hag o mirit e stad vad.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

War AR PROVOU

En ho trugarez, Aotrou Doue,  
plijet ganeoh santellaad ar provou-mañ, +  
ha, goude beza digemeret ar brovadenn euz Sakrifis Or Zalver,  
lakit ahanom e stad da veza, ni ivez,  
eur brovadenn beurbaduz d'ho kloar.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

D'an dud a vagit gand ar bara euz an Neñv,  
roit bepred, Aotrou Doue, ho skoazell;  
pa n'ehanit ket da dorma o halonou,  
grit dezo beza din euz ar zilvidigez peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

I9 ed SUL ORDINAL

LENNADENN GENTA - Ar profed Eliaz a zo lavaret dezañ mond er m-ez euz ar havarn  
ha Doue a ro dezañ da anaoud ema eno.

LENNADENN EUZ LEVR KENTA AR ROUANED

I9/9a, II-I3a

- 9a. Engavet war ar menez Sinai,  
ar profed Eliaz a antreas en eur havarn,  
hag a dremenas an noz eno.  
Lavaret e oe dezañ gand Doue:
- II. - Deus er mêz da chom dirag an Aotrou,  
rag o vond da dremen ema.  
Pa dosteas an Aotrou e tirollas eur gorventenn,  
ken kreñv ha ken diroll ma faoute ar menezioù,  
ha ma torre ar reier, dirag an Aotrou;  
med n'edo ket an Aotrou er gorventenn;  
goude ar gorventenn e oe eur hren-douar,  
med n'edo ket an Aotrou er hren-douar.
- I2. War-lerh ar hren-douar e oe eun tan,  
med n'edo ket an Aotrou en tan-se;  
ha war-lerh an tan, hiboud eun aezenn flour.
- I3. Kerkent ha m'he hlevas,  
Eliaz a holoas e benn gand e vantell,  
mond a reas er mêz hag e chomas dirag toull ar havarn.

SALM 84 9ab-I0, II-I2, I3-I4

|| Diskouezit deom, Doue, ho madelez,  
|| ha roit deom nerz ho zilvidigez.

- 9ab. Selaou a rin patra 'lavarao Doue, an Aotrou:  
Ar peoh evid e bobl, setu e gomzou.
- I0. Erru eo tost e zilvidigez d'an dud a zouj anezañ;  
e hloar a zeuio da jon war an douar.
- +++++
- II. Madelez ha gwirionez a ya an eil da gaoud abén,  
justis ha peoh d'en em vriata;
- I2. Ar wirionez a ziwano euz an douar  
hag euz an neñv e stouo ar justis.
- +++++
- I3. An Aotrou Doue a zigaso eürusted,  
hag an douar a zougo e frouez.
- I4. Ar justis a gerzo en e raog,  
hag a zigoro hent d'ar zilvidigez.
- +++++



EIL LENNADENN - Evid va breudeur, e karfen zoken beza milliget.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED

9/I-5

1. Va breudeur, an dra-mañ a asuran deoh stard e Jezuz Krist,  
hag ar wirionez eo.  
Ne lavaran ket a hevier ha va houstians a rent testeni din er Spered Santel.
2. Eun dristidigez vraz hag eur hlahar dibaouez a zo em halon.
3. Evid ar Yuzevien, va breudeur a ouenn,  
me garfe beza milliget, distaget diouz Jezuz Krist.
4. Rag bugale Israel int, kemeret da vugale gand Doue,  
dezo ar hloar, an emgleviou, al lezenn,  
dezo ar zervij sakr, promesaou Doue.
5. Dezo ar Batriarked,  
hag anezo, euz o gouenn eo ganet ar Mesiaz,  
an hini a zo dreist peb tra, Doue benniget da viken.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !

Plijet gand Tad Or Zalver Jezuz Krist,

sklerijenna daoulagad or halon,

hag e ouezim da hebez esperans e-neus or galvet. Alleluia !

AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. 14/22-33

22. Raktal, goude m'e-noa roet da zibri d'ar bobl en dezert,  
Jezuz a roas urz d'e ziskibien da zevel er vag,  
ha da vond en e raog en tu all d'ar mor,  
e-keid a ma vefe eñ o tigouvia ar bobl.
23. Goude m'e-noa digouviat anezo, e pignas war ar menez,  
en e bart e-unan, evid pedi.  
Deuet an noz edo eno e-unan-penn.
24. Ar vag a oa erruet dija eur pennad mad euz an aod,  
hejet gand an tonnou, rag a-eneb edo an avel.
25. Wardro fin an noz, Jezuz a-zeuas war-zu enno,  
o vale war ar mor.
26. Ouz e weled o vale war ar mor, e oe strafuillet an diskibien,  
hag e lavarjont: eur spes eo !  
Hag e stagjont da grial gand ar spont.
27. Med kerkent, e komzas Jezuz outo:  
- Ho pet fizianz ! emezañ, me eo, n'ho pet ket aoñ !
28. Neuze e komzas Pêr:  
- Aotrou, m'ar deo c'hwi an hini eo,  
roit urz din da vond beteg ennoh war an dour.
29. - Deus ! eme Jezuz.  
Ha Pêr diskenn euz ar vag  
ha bale war an dour da vond beteg Jezuz.
30. Med o weled an avel a oa, e krogas aoñ ennañ,  
hag o veza ma komanse da ziskenn en dour, e hopas:  
- Aotrou ! sikour !
31. Kerkent Jezuz a astennas e zorn, a dapas krog ennañ,  
hag a lavaras dezañ:

- Den a nebeud a feiz ! Perag az-peus bet douetañs ?  
 32. Ha pa cent pignet er vag, e torras an avel.  
 33. Neuze ar re a oa chomet er vag, en em daolas e-harz e dreid,  
     hag a lavaras dezñañ:  
     - E gwirionez, bez 'ez oh Mab da Zoue !

## PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue Oll-halloudeg ha peurbadel,  
 c'hwi hag a gredom pedi en eur lavared deoh: "On Tad",  
 lakit da vad en hor halonou ar spered a ra ahanom gwir vugale deoh,  
 evid ma hellim kaoud perz en heritaj prometet.  
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,  
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
 a oll viskoaz da virviken.

## WAR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer provadenn hoh Iliz,  
 pegwir c'hwi eo, en ho madelez,  
 ho peus<sup>o</sup>roet deom evid kinnig deoh,  
 ha c'hwi eo, dre nerz ho kalloud,  
 a ra dezo trei da veza Sakramant Or Zilvidigez.  
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

## GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Ar gomunion on eus grêt, Aotrou Doue,  
 o reseo ho tonezon er Zakramant,  
 ra dalvezo deom da veza salvet,  
 ha da veza starteet e sklerijenn ho kwirionez.  
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

LENNADENN GENTA - An estranjourien,int-i ivez,me o reno beteg va Menez Santel.

LENNADENN EUZ AR PROFED IZAIAS

56/I,6-7

- I. Sentit ouz al lezenn,grit ar pezh a zo just,  
rag war-nez erruout ema va zilvidigez,  
ha va justis a zo o vond da bara dizale.
6. Rag evid ar pezh a zell ouz bugale an estren,  
mad da zervija Doue,da gared e ano,  
da veza e zervicherien,  
kement-hini a vir mad deiz sakr ar Sabad,  
hag a zalh stard d'am Emglec,
7. me o reno beteg va menez santel;  
a levenez e kargin anezo e va zi a bedenn.  
Digemeret e vo war va aoter,  
o zakrifisou peurlosket,hag o zakrifisou all.  
Rag va zi a vo anvet ti ar bedenn evid an oll boblou.

SALM 66

2-3,5,6-8

|| Poblou ar bed d'ho meuli,Va Doue,  
|| an oll boblou d'ho meuli !

pe: Alleluia !

2. Plijet gand Doue skuill warnon e drugarez hag e vennoz,  
plijet gantañ diskouez deom . dremm (pe: bizaj) laouen,
3. ma hellim rei da anaoud dre ar bed ho lezenn antel,  
hag e-touez an oll boblou ho zilvidigez.

+++++

5. Joa ha levenez d'an oll boblou,rag c'hwi 'zo just o houarn ar bed,  
c'hwi 'zo reiz o rén ar poblou,  
hag ouz o heñcha war an douar-mañ.

+++++

6. Bezit meulet,o Doue,gand poblou ar bed !  
Ya,meuleudi deoh gand an oll boblou !
8. Doue d'or benniga ha da veza doujet dre an douar a-béz.

+++++

EIL LENNADENN - Ne zeu ket an Aotrou Doue en-dro war e zonezonou  
na war e halvadennoù.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED

II/I3-I5,29-32

13. Va breudeur, eun dra a lavaran deoh-c'hwi hag a oa payaned:  
me, va unan, a zo abostol ar bayaned,  
14. Hag e lakan va enor da ober va labour santel,  
me a glask renta va labour frouezuz evid, mar deo posubl,  
lakaad tud euz va gouenn da veza jalouz  
ha da zavetei lod anezo.  
15. Rag mar deo bet greet ar peoh etre ar bed ha Doue,  
pa oant bet taolet a gostez,  
petra 'zigouezo neuze 'ta pa vint bet resevet en-dro,  
netra nebeutok eged ar vuez goude ar maro !  
29. Ne zeu ket an Aotrou Doue en-dro war e zonezonou,  
na war e halvadennoù.  
30. Gwechall ho-peus dizentet ouz Doue,  
ha diwar dizentidigez bugale Israel,  
ho peus kavet bremañ trugarez .  
31. Evelse int-i ivez o-deus bremañ dizentet  
ablamour d'an 'rugarez ho-peus kavet,  
evid ma kavint int-i ivez trugarez.  
32. Rag Doue e-neus dalhet an oll dud en dizentidigez,  
evid beza trugarezuz e keñver an oll.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !

An deñved a zelaou va mouez, eme an Aotrou,  
me o anavez ha dond a reont d'am heul. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE.

I5/21-28

21. Jezuz a oa en em dennet e kostez Tyr ha Sidon.  
22. Ha setu eur Gananeanez deuet diwar ar hostezioù-se  
a zeuas da grial:  
- Ho pet truez ouzin, Aotrou, mab David,  
va merh a zo gwall-gaset spontuz gand an droug spered.  
23. Med eñ ne respontas gér.  
E ziskibien a dosteas da lavared dezañ:  
- Roit dezi he goulenn, rag ne ra nemed hopal war ol lerh.  
24. Ha Jezuz da respont:  
- N'on bet kaset nemed evid deñved dianket euz ti Israel.  
25. Houmañ a zeuas da stoui dirazañ, en eur lavared:  
- Aotrou, deuit war va zikour !  
26. Med eñ a respontas:  
- N'eo ket mad kemer bara ar vugale,  
evid e daoler d'ar chas bian.  
27. - Gwir eo, emezi, med ar chas bian o-unan  
a zebr ar bruzunou a gouez diwar daol o mistri.  
28. Neuze Jezuz a respontas, en eur lavared:

- O maouez, braz eo ho feiz !  
 Ra zigouezo ganeoh hervez ho c'hoant.  
 Hag he merh a oe pareet azaleg an eur-se.

# PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, evid an dud ho kar,  
 ho peus preparet madou na weler ket:  
 skuillit ho karantez en or halonou,  
 evid ma karim ahanoh bepred ha dreist peb tra,  
 ha ma hounezim an eürusted a brometit,  
 hag a zo en tu all da beb c'hoant.  
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,  
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
 a oll viskoaz da virviken.

# WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer or provou,  
 a reom ganto an eskemm n'e-neus ket e bar:  
 pegwir, diwar ginnig ar pezh 'zo bet roet deom ganeoh,  
 c'hwi hoh-unan eo a resevin.  
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

# GOUDE AR GOMUNION

Bremañ p'on eus resevet Or Zalver, er zakramant,  
 emaom stouet izel da bedi ho madelez, Aotrou Doue :  
 grit deom tenna dezañ atao gwelloc'h, er bed-mañ.  
 evid kaoud perz gantañ e gloar ar baradoz,  
 En on Doue beo,  
 a oll viskoaz da virviken.

2I ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Lakaad a rin war da skoaz alhwez ti David.

LENNADENN EUZ AR PROFED IZAIAS

22/I9-23

19. Setu amañ ar pezh a lavar an Aotrou Doue  
da Zebna ar gouarnour:  
Da derri a rineuz da garg ha lemel diganit da labour.
20. En deiz-se, e halvin va zervijer Eliakim, mab da Hilkiáz;
21. gwiska a rin dezañ da vantell,  
gouriza a rin anezañ euz da skorb ( zeizenn)  
ha rei dezañ da halloud,  
boz 'e vo eun tad evid tud Jeruzalem,  
hag evid tud Juda.
22. E zanka a rin stard evel eur poul er haled,  
hag e teuo da veza eun tron a hloar evid ti e dad.

SALM I37

I-2a, 2bc-3, 6, 8bc

|| Mil bennozh deoh, Aotrou Doue,  
|| santel ha mad, nerz va ene.

- I. Mil bennozh deoh, Aotrou Doue, a greiz va halon,  
ablamour m'ho peus selaouet va homzoù;  
dirag an êlezh, e kanan ho meuleudi;  
2a stoui 'ran d'an douar dirag ho ti santel.
- +++++
- 2bc Bennozh deoh evid ho madelezh hag ho fealded d'ho kër,  
rag greet ho peus evidom en tu all d'ho promesa.
3. P'am eus ho pedet, ho peus va selaouet;  
kresket ho peus an nerz om halon.
- +++++
6. Uhel oma an Aotrou Doue; gwelod a ra an dud a renk izel;  
euz a bell eh anavez an dud lorchuz.
- 8bc. Aotrou Doue, ho madelezh, n'eus fin ebed dezhi;  
rag-se, ne zilezit ket an nob a zo labour ho taouarn.
- +++++

000000000000000000

EIL LENNADENN - Peb tra a zeu anezañ,peb tra a zo dezañ hag evitañ.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL D'AR ROMANED

II/33-36

33. Na pebez dousder e pinvidigoz,furnoz ha skiant Doue !  
Na pegen diêz eo lonn e zivizou,  
na pegen diêz kompren e venozioù !
34. Piou e-neus anavezet menoz an Aotrou Doue ?  
Piou e-neus bet d'e guzulia ?
35. Piou e-neus roet dezañ da genta,  
hag a veritfe kaoud d'e dro euz e berz ?
36. Peb tra a zeu anezañ,a zo drezañ hag evitañ,  
dezañ ar hloar da virviken.Amen.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !  
Me eo an hent,ar wirionoiz hag ar vuoz.  
An neb a fell dezañ kavoud an Tad,  
a dle tremen drezañ. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

I6/I3-20

- I3. Jezuz a oa deuet e korn-bro Sezare-Filip,  
hag e ree ar goulenn-mañ ouz e ziskibien:  
- Hervez lavarou an dud,piou eo Mab an Den ?
- I4. Int-i da respont:  
- Evid lod eo Yann Vadezour,evid re all Eliaz,  
evid re all c'hoaz Jeremias pe unan euz ar brofeted.
- I5. - Ha c'hwi,petra lavarit ?  
Evidoh piou ez on-me ?
- I6. Simon Pêr a gemer ar gaoz hag a lavaras:  
- C'hwi a zo ar Mesiaz,Mab an Doue beo!
- I7. Jezuz o kemer ar gaoz d'e dro a lavaras:  
- Eüruz out,Simon,mab da Jonaz,  
rag n'eo ket ar hig nag ar gwad  
o-deus roet dit da anaoud an dra-ze,  
med va Zad a zo en neñvou.
- I8. Ha me a lavar dit ez out mên  
ha war ar mên-se e savin va Iliz  
ha galloud ar marc ne vo biken treh dezi.
- I9. Rei a rin dit alhwezioù Rouantelezh an Neñvou,  
ha kement az po liammot war douar  
a vo liammot en Neñvou,  
ha kement az po diliammot war an douar  
a vo diliammot en Neñvou.
20. Neuze e roaz urz d'e ziskibien  
da jom heb lavared da zen e oa eñ ar Meziad.

2I ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Lakaad a rin war da skoaz alhwez ti David.

LENNADENN EUZ AR PROFED IZAIAS 22/I9-23

19. Setu amañ ar pezh a lavar an Aotrou Doue  
da Zebna ar gouarnour:  
Da derri a rineuz da garg ha lemel diganit da labour.
20. En deiz-se, e halvin va zervijer Eliakim, mab da Hilkiáz;
21. gwiska a rin dezañ da vantell,  
gouriza a rin anezañ euz da skorb ( zeizenn)  
ha rei dezañ da halloud,  
bez 'e vo eun tad evid tud Jeruzalem,  
hag evid tud Jüda.
22. E zanka a rin stard evol eur peul er haled,  
hag e teuo da veza eun tron a hloar evid ti e dad.

SALM I37 I-2a, 2bc-3, 6, 8bc

|| Mil bennoz deoh, Aotrou Doue,  
santel ha mad, nerz va ene.

- I. Mil bennoz deoh, Aotrou Doue, a greiz va halon,  
ablavour m'ho peus selaouet va homzou;  
dirag an êlez, e kanan ho meuleudi;  
2a stoui 'ran d'an douar dirag ho ti santel.
- +++++
- 2bc Bonnoz deoh evid ho madelez hag ho fealded d'ho kër,  
rag greet ho peus evidom en tu all d'ho promesa.
3. P'am eus ho pedet, ha peus va selaouet;  
kresket ho peus an nerz en halon.
- +++++
6. Uhel emañ an Aotrou Doue; gwelod a ra an dud a renk izel;  
euz a bell ch anavez an dud lorchuz.
- 8bc. Aotrou Doue, ho madelez, n'eus fin ebod dezhi;  
rag-se, ne zilezit ket an nob a zo labour ho taouarn.
- +++++

000000000000000000



EIL LENNADENN - Peb tra a zeu anezañ,peb tra a zo dezañ hag evitañ.

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL D'AR ROMANED

II/33-36

33. Na pebez dousder e pinvidigoz,furnez ha skiant Doue !  
Na pogen diêz eo lenn e zivizou,  
na pogen diêz kompren e venozioù !
34. Piou e-neus anavezet menoz an Aotrou Doue ?  
Piou e-neus bet d'e guzulia ?
35. Piou e-neus roet dezañ da genta,  
hag a veritfe kaoud d'e dro euz e berz ?
36. Peb tra a zeu anezañ,a zo drezañ hag evitañ,  
dezañ ar hloar da virviken.Amen.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !  
Me eo an hent,ar wirionez hag ar vuez.  
An neb a fell dezañ kavoud an Tad,  
a dle tremen drezañ. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

I6/I3-20

- I3. Jezuz a oa deuet e korn-bro Sezare-Filip,  
hag e ree ar goulenn-mañ ouz e ziskibien:  
- Hervez lavarou an dud,piou eo Mab an Den ?
- I4. Int-i da respont:  
- Evid lod eo Yann Vadezour,evid re all Eliaz,  
evid re all c'hoaz Jeremias pe unan euz ar brofeted.
- I5. - Ha c'hwi,petra lavarit ?  
Evidoh piou ez on-me ?
- I6. Simon Pêr a gemer ar gaoz hag a lavaras:  
- C'hwi a zo ar Mesiaz,Mab an Doue beo!
- I7. Jezuz o kemer ar gaoz d'e dro a lavaras:  
- Eüruz out,Simon,mab da Jonaz,  
rag n'eo ket ar hig nag ar gwad  
o-deus roet dit da anaoud an dra-ze,  
med va Zad a zo en neñvou.
- I8. Ha me a lavar dit ez out mên  
ha war ar mên-se e savin va Iliz  
ha galloud ar maro ne vo biken treh dezi.
- I9. Rei a rin dit alhweziou Rouantelez an Neñvou,  
ha kement az po liammot war douar  
a vo liammot en Neñvou,  
ha kement az po diliammot war an douar  
a vo diliammot en Neñvou.
20. Neuze e roaz urz d'e ziskibien  
da jom heb lavared da zen e oa eñ ar Meziaz.

## PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, c'hwi a lak an holl gristenien  
da gaoud ar memez bolontez:  
grit deom kared ho kourhemennou,  
ha c'hoantaad ar madou a brometit,  
hag evelse, tra ma vez traou ar bed-mañ o trei hag o tistrei,  
chom heb distaga or halonou euz bro ar wir levenez.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

## WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, dre Zakrifis or Zalver, grêt eur wech euid mad,  
eo bet prenet an dud da veza pobl ho pugale:  
plijet ganeoh, en ho madelezh,  
rei deom gras an unaniez hag ar poeh en hoh Iliz.  
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

## GOUDE AR GOMUNION

Hb pedi a reom, Aotrou Doue, ma labour ennom  
vertuz ar remed roet d'on oneou gand ho trugarez;  
ha grit ahanom seurd kristenien, atao war wellaad,  
ma hollim plijoud deoh e pob tra.  
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

GOUEL AR GALON ZAKR A

LENNADENN GENTA - An Aotrou Doue e-neus ho karet hag ho tibabet.

LENNADENN EUZ LEVR AN ADLEZENN

7/6-II

6. Moizez a lavare da bobl Israel:  
- Te a zo eur bobl gouestlet d'an Aotrou, da Zoue,  
te eo e-neus, a-douez an oll boblou a zo war an douar,  
dibabet evid beza e bobl dezaf e-unan.
7. M'e-neus Doue roet deoh e garantez,  
m'e-neus ho tibabet, n'eo ket ma vefeh  
an niverusa euz an oll boblou,  
rag n'eus ket disteroh pobl egedoh.
8. Med dre garantez evidoh,  
evid delher d'al le greet d'ho tadou,  
eo e-neus Doue, dre e zorn nerzuz,  
greet deoh dond er mêz euz bro Ejipt,  
hag ho tilivret euz ti ar sklavèrèz,  
hag euz galloud Faraon, roue an Ejipt.
9. C'hwil a ouezo eta eo ar gwir Doue, an Aotrou, ho Toue,  
an Doue feal, a zalh d'e omgleo ha d'e garantez,  
ha dreuz rummadou ha rummadou,  
evid ar re a gar anezaf hag a vir e hourhemennou,
10. Med a gastiz enno o-unan ar re o-deus kasoni outaf.  
Kas a ra dizale da goll an neb e-neus kasoni outaf,  
ennaf e-unan e kastiz anezaf.
- II. C'hwil a viro eta ar gourhemennou, al lezennou ha kustumou  
a ran deoh hirio senti outo.

SALM IO2

I-2,3-4,6-7,8,10

|| Kanom bennoz da Zoue, va ene ! Kanom bennoz da Zoue !

(Kantikou n°10)

1. Lavar bennoz da Zoue, va ene,  
kement a zo em hreiz, bennoz d'e ano santel !
2. Ya, va ene, lavar bennoz d'an Aotrou,  
na zizonj morse e oll vadoberou.  
+++++
3. Enn an hini a bardon dit da oll behejou,  
a bare ahanout euz peb kleñved;
4. Enn an hini a ziwall da vuez diouz ar maro,  
a ra dit eur gurunonn gand o vadelez hag e drugarez.  
+++++
8. Madelez ha drugarez eo an Aotrou Doue,  
diwezad da dêri ha madelezuz kenaf.
9. N'eo ket hervez or pehejou e ra en or heñver,  
n'eo ket diouz an droug a room o kastiz ahanom.  
+++++
12. Keit ha m'ema ar zav-hool euz ar huz -heol, e kas pell diouzon or pehejou.
13. Evel m'e-neus eun tad kalon dener euz o vab,  
evelse an Aotrou Doue evid an dud a zouj anezaf.  
+++++

LENNADENN GENTA - Sklerijenn dispar war ar pezh m'eo Doue: Karantez.

LENNADENN EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT YANN 4/7-I6

7. Va re muia karet, en em garom an eil egile,  
pegwir eo ar garantez euz a Zoue,  
ha kement hini e-neus karantez a zo ganet euz a Zoue  
hag e-neus anaoudegez a Zoue (pe: euz Doue).
8. An neb n'e-neus ket karantez n'anavez ket Doue,  
rag Doue a zo karantez.
9. Evelhenn eo deuit karantez Doue da bara en on touez:  
e Vab unganet e-neus Doue kaset er bed,  
deom da gaoud buez drezañ.
10. Amañ eo emañ ar garantez : n'eo ket ni on eus karet Doue,  
med eñ an hini e-neus karet ahanom ha kaset e Vab  
da veza roet e sakrifik euid pardon ar pehojou.
11. Va re muia karet, pegwir e-neus Doue or haret evelse,  
ni, d'on tro, a dle kaoud karantez an eil euid egile.
12. Doue n'e-neus den gwelet anezañ biskoaz;  
med, ma 'n em garom an eil egile, emañ Doue o chom ennom,  
hag e garantez a zo ennom en he haerra.
13. Gand an dra-mañ ez om sur emañ o chom ennom,  
hag eñ o chom ennom:  
perz en e Spored e-neus roet deom.
14. Ha ni, p'on eus gwelet gand on daoulagad, ni a ro testeni  
e-neus an Tad kaset e Vab da veza Salver ar bed.
15. Kement hini a ziskleir eo Jezuz Mab Doue,  
ema Doue o chom ennom, hag eñ o chom e Doue.
16. Ha ni 'zo deuit da anaoud ervad, dre ar foiz,  
ar garantez e-neus Doue euidom.  
Karantez eo Doue: an neb a zo o chom er garantez  
a zo o chom e Doue,  
ha Doue 'zo o chom ennom.

#### SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !

Kemerit warnoh va yec, deuit d'ar skol ganin,  
rag me 'zo dous hag izel a galon. Alleluia !

#### AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

II/25-30

25. Jezuz a savas e vouez hag a lavaras:  
- Ho meuli a ran, Tad, Mestr an Neñv hag an douar,  
o veza m'hoc'h eus kuzet an traou-se ouz an dud fur  
hag an dud skianteg hag o diskuillet d'ar re vian.
26. Ya, Tad, rag evelse eo bet plijet deoh.
27. Peb tra zo bet lakeet etre va daouarn gand va Zad  
ha den ebed ne anavez an Tad nemed ar Mab,  
hag an hini a fell d'ar Mab hen diskulia dezañ.
28. Deuit davedon, c'hwi oll hag a zo skuiz  
hag a bleg dindan ar zamm  
ha me a lammo ar beh diwarnoc'h.



Kemerit warnoh va yeo.

29. Ha deuit d'ar skol ganin, rag me a zo dous hag izel a galon  
hag e kanoh an diskuiz.

30. Ya, va yeo zo èz da zougen  
ha va zamm zo skanv.

#### PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg, p'emaom oh enori Kalon Zakr ho Mab karet,  
en eur vaga ennom ar zonzj euz merkou brasa e garantez evidom,  
grit ma kavim bepred enno eur vammenn a joa hag a hrasou.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh  
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

#### WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,  
selled ouz karantez dreist-muzul Kalon ho Mab karet,  
evid ma hello ar zakrifis a ginnigom plijoud deoh  
ha rei deoh an digoll euz or pehejou.  
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

#### GOUDE AR GOMUNION

Dre ar Zakramant-mañ euz ho karantez, Salver Jezuz,  
ho pedom da domma or halonou gand tan ho Kalon Zakr,  
evid ma vim gouest, hervez ho kourhemenn,  
da gared or breudeur evel m'ho peus-c'hwi or haret.  
C'hwi on Doue beo gand an Tad hag ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

SUL AN DREINDED A

LENNADENN GENTA - An Aotrou on, an Doue leun a vadelez hag a drugarez.

LENNADENN EUZ **KIL** LEVR MOIZEZ

Er.34/ 4b-6,8-9

- 4b. Moizez a zavas mintin-mad,  
hag e pignas war menez Sinaï,  
hervez m'e-noa roet urz dezañ an Aotrou.
5. An Aotrou a ziskennas er goumoulenn hag a chomas e-kichen Moizez,  
hag e lavaras an ano:Yahvé.
6. Tremen a reas dirag Moizez, en eur ziskleria a vouez kreñv:  
- Yahvé, an Aotrou, Doue tener a galon ha drugarezuz,  
leun a basianted, troet da garet ha fidel d'e hér.
8. Kerkent e kouezas Moizez d'an daoulin war an douar  
hag e stouas.
9. Hag e lavaras:  
- Mar deo gwir, Aotrou, ez on deuet da blijoud deoh,  
deuit da jom en on touez,  
rag eur bobl kalet a benn eo houmañ;  
med c'hwi a bardono or mankou hag or pehejou,  
hag a ray ahanom eur bobl hag a vo deoh.

SALM Daniel 3/52,53,54,55,56

|| Deoh-c'hwi, Aotrou Doue,  
gloar ha meuleudi da viken !

52. Meuleudi deoh, Aotrou, Doue on Tadou !

DEOH GLOAR HA MEULEUDI DA VIKEN !

53. Meuleudi d'hoh ano a hloar hag a zantèlez. D/

54. Meuleudi deoh, e templ santel ho kloar ! D/

55. Meuleudi deoh, war dron ho rouantelez. ! D/

56. Meuleudi deoh, c'hwi hag a wel en donderiou kuzet. D/

Meuleudi deoh hag a zo azezet war ar herubined ! D/

Meuleudi deoh e bolz an Neñvou ! D/

DEOH GLOAR HA MEULEUDI DA VIKEN !



EIL LENNADENN - Gras santel or Zalver Jezuz Krist,  
karantez Doue an Tad, ha sklerijenn ar Spered Santel.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT

13/II-13

11. Va breudeur, bezit laouen,  
klaskit tizoud ar zantelez,  
lakit nerz-kalon ennoh, en em glevit etrezoh,  
bevit e peoh, hag an Doue a garantez hag a beoh a vo ganeoh.
12. Roit ho salud an eil d'egile, gand eur pok santel.  
An oll dud santel a ra deoh o gourhemennou.
13. Gras santel or Zalver Jezuz Krist, karantez Doue an Tad  
ha sklerijenn ar Spered Santel, ra vint ganeoh oll.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !

Gloar d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel !  
Gloar d'an Hini a zo, a oa, hag a zeu. Alleluia !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN

3/I6-18

16. En amzer-se, Jezuz a lavar da Nikodem :  
- Ker braz eo bet karantez Doue evid ar bed,  
ma 'neus roet e Vab unganet,  
evid ma vo kemen den e-neus feiz ennañ diwallet da vond da goll,  
pell ahanoevid ma 'no buez peurbaduz.
17. Rag Doue e-neus digaset e Vab er bed,  
n'eo ket evid barn ar bed,  
med evid ma vo salvet ar bed drezañ.
18. An neb e-neus feiz ennañ a zo kuit a veza barnet ;  
an neb na gred ket e-neus dija e varnodigez,  
pegwir n'eo ket fellet dezañ kaoud feiz e Mab unganet Doue.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, c'hwi ho peus kaset er bed,  
ho Mab karet hag ho Spered a zantelez,  
evid sklerijenna an dud war mister ho puez :  
grit doom eta, beb gwech pa zisklorion ar gwir feiz,  
renta gloar d'an Dreinded santel  
hag adori eun Doue hebkén oll-halloudeg.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll-viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU

Ho pet ar vadelez, Aotrou Doue, pa bedim bremaig hoh ano santel,  
da skuill ho pennoz war provou an overonn-mañ, ha d'on lakad reizh e stad  
da veza, ni ivez, eur brovadenn kinniget deoh evid atao. (pe:da viken)

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, grit ma vo ar gomunion-mañ talvouduz doom evid  
mad ar horv hag an ene, ha ma talhim mad d'or feiz on Dreinded santel, eun  
Doue hebkén o tri ferson. Dre Jezuz Krist, or Zalver.